

Ar yaouankiz ? Un temz-spered

Roazhon. Miz Du. An avel a c'hwezh er straedoù. Klevout a reer c'hoarzhadennoù ar pratikoù a-dreñv prenestroù an ostalerioù. En em damolodiñ a ra ar vutunerien e goudor ur porrastell. Gleb eo pep tra gant ar glav tanav. Penaos gortoz distro an devezhioù kaer pa vo sonioù ha tonioù festoù an hañv o tasseniñ e Breizh ? Penaos leuniañ e sac'h gant krouidigezhioù diwezhañ hon arzourien ? Bezit dinc'h. Pedet oc'h da Yaouank 2013.

E 1999, pa oa bet aozet ar festival evit ar wech kentañ, n'o devoa an arvesterien nemet un devezh evit tañva ur sonerezh a oa dibaot evit kalz anezho. An amzer a dremen buan ha setu ar 15^{vet} abadenn war ar stern. Da gentañ e kinnigo Yaouank Bis'TRO nav lec'h disheñvel, adalek deroù miz Du betek fin ar festival, evit ober anaoudegezh gant strolladoù ampart. En eil sizhun e c'hello an dañserien digropañ o izili gant ar fest-noz a vo aozet e salioù nevesaet ar Jardin Moderne. Gant ar bleustradeg-se e vint prest da zegemer distro ur strollad mojennel e-pad sadornvezh ar MusikHall : Ar Re Yaouank.

SONERIEN AR BLOAVEZHIOÙ '90

Er bloavezhioù 1990 e oa ur rummad tud nevez, er festoù-nnoz, hag a oa plijet gant ur sonerezh doare rock mesket gant identelezh Breizh. Diskouezet o deus ar vreu-deur Guichen (akordeon, gitar), Gael Nicol (bombard, biniou), David Pasquet (bombard) ha Stéphane de Vito (gitar-boud) pegen entanet e c'hall bezañ an dañserien, a-stroll, gant o notennoù kizellet evel bravigoù. Un danvez eo ar sonerezh a c'hell bezañ lieskementet e nerzh dre al leuren-niñ ha c'hoari ar gouloù. Saouzanus eo an disoc'h : ur meskaj etre ur fest-noz hag ur sonadeg.

PEDET DA SENIÑ ASAMBLES ADARRE

Divodet e oa bet ar strollad e 1998. Diouzhtu goude an disparti en doa pedet Glenn Jegou (rener arzel Skeudenn Bro Roazhon, ar gevredigezh a ginnig Yaouank) izili ar strollad da adsevel Ar Re

Yaouank evit abadenn gentañ ar festival e 1999. Ne oa ket deuet a-benn da gendrec'hiñ anezho rak c'hoant o devoa kemer perzh e raktresoù all. Evelkent eo bet gwelet ar vreu-deur Guichen ha David Pasquet (paeron abadenn 2004) o seniñ war leurenn Yaouank e-pad ar bloavezhioù 2000. Er bloaz-mañ hor bo ar chañs da welet pe da adwelet anezho da-geñver ar brasañ fest-noz aozet e Breizh. Eizh mil den zo gortozet. Furoc'h e vo prenañ e blas en a-raok ! Un abadenn dibar e vo nozvezh diwezhañ Yaouank. Ret eo lavarout ne vo ket adsavet Ar Re Yaouank. N'o deus ket amzer a-walc'h evit aozañ un droiad da skouer, hag evit ma rafe berzh ur strollad sonerien e rank pep hini bezañ engouestlet 100 % ennañ.

TEMZ-SPERED AR RE YAOUANK

Titloù o fladennoù Breizh Positive ha Fest-noz still alive a ziskoueze petra oa o mennoz : desachañ yaouankiz ar vro war-zu ar festoù-nnoz evit reiñ un dazont d'un eztaol pobl a vod ar Vretoned e koulz un nozvezh. Emañ ar festival Yaouank war an hevelep hent. Fellout a ra d'an aozerien lakaat ar rummadoù nevez da gompren ez eo sonerezh Breizh estreget un hêrezh da wareziñ, ul lec'h evit krouiñ ne lavaran ket.

Tangi Legavre



Yaouank Bis'TRO :
etre ar 4 hag an 22 a viz Du

Jardin Moderne :
d'ar Yaou 14 a viz Du

MusikHall :
d'ar Sadorn 23 a viz Du



...Hag ar memes re e 2013.
sk. © Eric Legret



Sal vras ar MusikHall zo prest da zegemer miliadoù
a dañserien.
sk. © Christian Le Priol

